

Proux : (Poullaouen 1811 – Montroulez 1873).

Taolenn

Kovesion ar Pitaouer

Diviz etre eur hliant yaouank hag eur riskerez koz

An hini goz hag an hini yaouank

Kovesion ar Pitaouer

Ar “Pénitent“

Gand eur hlahar vraz em halon,

Ma zad, on deut d’ho kaved

D’ober deoh eur govesion

Deuz va buhez debordet.

An Tad-kovesour

Dirollet mad ho chapeled,

Bezeta gwirion penn-da-benn,

An absolvenn a veritfet

Mar ho-peus eur wir anken.

Ar “Pénitent“

A-viskoaz on bet eur hanfard,

Eur merhetaer ar gwasa ;

Ne oan ‘med eun tammig krennard

Ma karen kalz o starda.

Pa welen eur plah koant bennag,

Ma gwad ennon a verve,

Ma halonig a ree “Tik-Tak“.

An tad

Ne zanteh mann ouspenn-ze ?

Ar “Pénitent“

Eur blijadur deuz ar vrasa

Em-boa o weled Mari

Beb noz deuz en em dihwenna

Hag o sikour anezi.

An tad

Gwelloh e vije bet deoh-hu

Deski ho katekismou,

C’hoari kornigell ha dotu

‘Vid dihwenna merhejou.

Ped hoh-eus-hu c’hoaz dihwennet ?

Ar “Pénitent“

Ne oun ket ervad, war ma fe’,

Rag abaoe deg vloaz tremenet

E heulian ar vicher-ze.

An tad
Leret diwar-benn ar genta.

Ar “Pénitent“
O ! va zad, me ho tisfi
Da gaved e-barz ar gêr-ma’
Eur plah ken tentuz hag hi.
Nann, biskoaz n’ho-peus gwelet
Eul lagad ken birvidig,
Eun tammig korv ken brao stummet,
Eur bael ken manifig,
Eur begig flemm ‘vel eur rozenn,
Eur zellou lemm ha lirzin
He bleo du ‘vel eur vouarenn.

An tad
Kendalhet beteg ar fin !

Ar “Pénitent“
Deg vloaz ‘zo bet da veurlarje’,
O ya ! soñj mad am-eus dalhet !
E ris ar pehed mignon-ze.

An tad
Leveret mad ‘vel ma ‘peus greet !

Ar “Pénitent“
‘Barz en he zi pa arruis
E kavis ma dousig koant
O tilemel krak he hiviz.

An tad
Re evuruz e oah, klient !

Ar “Pénitent“
Obezr a ree van da ouela
Pa rois eur pok dezi.
Ha me raktal d’he briata.

An tad
Ijin mad d’he honsoli !

Ar “Pénitent“
A-grenn-dost e oa eur gwele.
Warnezañ e oan kouezet.
Ar rest ‘ouzoh koulz ha me.

An tad

Nann da, ne zivinan ket !

Ar “Pénitent“
Eno seiz kwech e tañveis
Dioustu ar frouez divennet
An hini¹ a gavis mad-iskiz !

An tad
Ma mab, brabañsad a ret !

Ar “Pénitent“
Mar ne laran ar wirione’
Me ‘houlenn beza spahet
‘Vel eur porhell pe eur hole !

An tad
Pell ‘zo ho-peus meritet !

Ar “Pénitent“
Abae m’am-eus bet tañveet
Eur zoubennig ken karabl²
Em-eus bet atao kendalhet !

An tad
Terri a rey deoh, va mab !

Ar “Pénitent“
O ! ya. Santoud a ran dija
Ez oh eun diviner mad,
Rag trehel a rankan brema’
Pe me lipo diou loaïad !

¹ An hini : P’hini, er skrid orin.

² karabl : karadeg.

Diviz etre eur hliant yaouank hag eur riskerez koz

War don : Paotred Plouillo.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, bet ez oh koant gwechall ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon koz, koantiri 'zo eun dra fall ;
Koulskoude e oan plah terrupl, degajet, krohennet kaer.
Va lañchenn distagellet, va lagad lemm ha seder.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, bet ho-peus servijerein ?

Ar plah

O ! nann biskoaz, va mignon koz, rag n'houl ket ar veleien ;
Koulskoude ne oan ket skornet, plijoud a ree din Pipi,
Ha pa frote eur plah all e santen 'vel jalouzi.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, tenerreet 'n-eus ho kalon ?

Ar plah

O nann ! biskoaz, va mignon ker, rag ar pech am-oa aon.
Koulskoude eur zulvez pardon e houllas ker brao ouzin
Rei dezañ eun toullad pokou ma oa red din asantiñ.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, 'oant ket pokou penn-da-benn ?

Ar plah

O nann biskoaz ! va mignon ker, n'avanturis va hrohenn ;
Koulskoude eun nozvez bennag ma oan o prezeg dezañ
E prezegas ker brao ivez ken a riskis a gredan.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, risket ho-peus c'hoaz goude ?

Ar plah

O nann biskoaz ! va mignon ker, nemed an noz valeüruz-se ;
Koulskoude, 'vid lavared gwir, aliez pa zivunen
E vijen meurbed souezet o kaoud Pipi em barlenn.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, riska 'rafeh c'hoaz brema' ?

Ar plah

O nann ! biskoaz, va mignon ker, gwell 've ganin perisa ;
Koulskoude mar ve red absolu ober ze d'ho soulaji,

Ne me ket asur ar galon da zoned d'ho refuzi.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, dre an hent-se 'h eer d'an Neñv ?

Ar plah

O ! nann biken, va mignon ker, ne gavfet ker reiz hag hen.

Ar paotr

Ho trugare', moereb Kato, ho kelenn nan eo ket fall,
Ha koulskoude 'vid 'n em zalvi, me 'gembro eun hent all.

An hini goz hag an hini yaouank